

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

DRUZ

Druz

Un anv-gwan kozh an hini eo, drutos e galianeg,
deuet da vezañ dru e galleg

« Ar yeot a vounta druz »,
ar yeot a vount stank




http://www.reseau-canope.fr/tes/skeudennaoueg/skeudennoù_krouet_gant_Malo_Ar_Menn

Douar druz = douar mat

« An hent zo druz »,



pa vez douar war an hent goude ma
vije bet serret ar mais da skouer



Un dra druz, pa vez gleb un dra
bennaket gant dour pe gant eoul

« N'eo ket druz ar soubenn »,
« N'eo ket druz an traoù »,
an dud n'o deus ket kalz arc'hant

« N'eo ket druz ar soubenn gantañ »,
n'eo ket gwall binvidik an den-se



Druzoni, an eoul a vez
lakaet war ur mekanik
peotramant an tamm
druzoni 'zo war ar c'hig
pe war ar soubenn

Druzonienn, ar gwiskad
druzoni war ar boued

« N'ay ket gwall bell ar
soubenn-se »,
n'eo ket druz a-walc'h,
n'he deus ket daoulagad
(tammoù druzoni)



Ur gontadenn druz
= ur gontadenn lous

« Druz-mat eo an traoù
memestra »,
n'eo ket gwall bropr
ar pezh a vez kontet

« Komzoù druz »
= komzoù hudur

COFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne



Avec le Fonds européens
de développement régional



le Gaden
a d'ad